



## GUERZ

### GATHEL-GOLLET.

An dra-mâ zo erruet er guær a Itara,  
en Indes-sav-eol, er bla 1560.

PED den, sioüas, a zo dalc'het  
Dre al laçou an drouc-speret !  
Ped den a guev daonation  
Oc'h ober goäl gôvession !

Cetu un exempl trist meurbet  
Zo bet en Indes c'hoarvezet :  
Tud coz, tud yaouanq, clêvit-tâ,  
Qemerit patron diountâ.

Ur plac'h yaouanq, hanvet Cathel,  
Mates e ty-un demesel,

Evit beva diouc'h he roll,  
A guittas Doue en oll d'an oll.

N'e d'oa qet pemzec vloas fournis  
Pa gommanças e yaouanqis,  
He yaouanqis a roas d'ar bed,  
D'ar gloar, d'an danç, d'an drouc-speret.

Bep Sul ha bep Gouel ordinal  
Ne c'houenne nemet bragal :  
Goude'n ofern betec an nos,  
An danç a voa he Barados.

En ilis hed an ofiç divin  
Ne rē nemet prezeg, c'hoarzin ,  
Ha trei he fenn scàn da sellet  
A bep tu ouc'h ar galantet.

Biscoas ne glêvas a galon  
Nac an ofern, nac ar sarmon :  
El lec'h clêvet ar gousperou,  
E zê atao d'an ebatou.

Mont a ra c'hoas d'an nosveziou ,  
Da scol cruel an diaoulou ,  
En despit d'escop, d'e mestres ,  
O lamet evel un heizes.

Eno o tisqas mil bec'het,  
Ancounec'hât Doue, plijout d'ar bed ;  
Eno e tisqas comzou lic,  
Sònjou ha desirou lubric.

Scuis voa Doue ouc'h he güelet  
Souillet gant qelies a bec'het ;  
O caout un donjer bras outi,  
Ne allas mui e anduri.

Sqeia eure gant ur c'hlénvet  
An danvad, pell voe dianqet :  
Ma carje côves ha distrei,  
C'hoant en devoa pardoni dei.

He mestrez, mat ha damantus,  
Pa velas he stat perillus,  
A lavaras dezi : Cathel,  
Va merc'h, ho c'hlénved zo cruel.

Considerit gant dilijanç,  
Qement zo var ho consciانç ;  
Nettait ervat hoc'h ene,  
Evit mont hardi dirac Doue.

Qemennet voe ur Religius,  
Un den humbl ha trugarezus ;

**Ar plac'h a gôvessas onnta  
Abars mont demeus ar bed-mâ.**

**En nôs goude ma côvessas  
E velas ur sclêrijen vrás,  
Ha qerqent un demesel venn,  
A gomzas outi evel-hen.**

**Clêvit ha clêvit c'hoas, Cathel,  
Et è ho puez, ret eo mervel ;  
Me a zo Mari-Madalen,  
Advocades ar bec'herien.**

**Côvessait c'hoas hep faut ebet,  
Rac ur pec'het oc'h eus nac'het ;  
Tolit an ampoeson cuset,  
P'otramant e viot collet.**

**Clasqet voe an tad adare,  
Da gôves ar plac'h a neve ;  
Hoguen he zêod a voa straguet  
Gant ar vez hac an drouc-speret.**

**Goude ze just, d'an anter-nôs,  
Pa ne alle Cathel repos,  
E tistro Mari-Madalen,  
Hac a gomz outi evel-hen.**

Cathel , petra oc'h eus-hu grêt?  
Eur pec'hel vil oc'h eus cuzet ;  
Cuzet oc'h un ampoeson ,  
A vo caus d'ho taonation.

Antronôs , pa darzas an de ,  
E retornas an den Doue ;  
An den Doue a zigassas  
An nouen dezi hac ar groas.

An tad , pa antreas en ty ,  
A lavaras a grenn dezi :  
Mar zeus netra var ho concianç ,  
Livirit-e gant repantanç.

Livirit franc , hep nac'h netra ,  
Deut è an termen diveza ;  
Laqit eves , va c'hoar Cathel ,  
Abars un heur eo ret mervel.

E qeit ma voe eno an tad ,  
Prest , ma cargo , d'he c'hôvessât ,  
Cetu c'hoas Mari-Madalen  
O prezeg outi evel-hen.

Cathel , siouas , c'houi oc'h eus grêt  
Eur pec'het vil ha milliguet ;

Côvessait-e gant queus parfet,  
Ha me bromet e viot salvet.

En amzer-ze, a gostes cleiz,  
E tilamas ul loen direiz,  
E faç e guis d'un den téval  
E dreid evel d'un aneval.

En e zorn en doa ur c'hleze,  
Pe gant hini be gourdrouze :  
Mar côvesses, me as lazo,  
Mar tevez, me as crai salo.

O tromplerez an drouc-speret!  
Ar plac'h a varv en he sec'het !  
Qerqent e za dirac Jesus,  
Gant he bec'h ponner ha mezus.

An nôs goude m'oe anterret,  
En ty ma rentas he speret ,  
O tra estranch! a hed an nôs  
Ne allas tam nicun repos.

Qement scabel a voa en ty,  
Qement tra oll a voa enni,  
A voe tolet ha distolet,  
Gant un tourni horrubl meurbet.

Pa zavas , antronôs beure ,  
An eil vates er maner-ze ,  
Ebars ar jardin e velas  
Ur speç cruel gant eston vrás.

E creiz un tan bras ha griziez ,  
E velas hanat ur plac'h quez ,  
He bizach leun a zerpantet ,  
Hac e daoulagad a zourdet.

Petra benac ma stravillas ,  
Na mui na mes e lavaras :  
Me as conjur abers Doue ,  
Lavar din-me petra out-te.

He ben qen trist a respondas ,  
O ouela gant nec'hamant vrás :  
Cathel oun , ho camaradez ,  
Condaonet d'ar flamou griziez.

Cetu va dorn , qiriec d'am c'heuz ,  
Cetu va zeot , qiriec d'am c'heuz :  
Va dorn en deus grêt ar pec'het ,  
Va zeot en deus-e bet nac'het.

Gant Mari-Madalen oun bet  
Daouzec guech sur avertisset ,

D'ober ur güir gôvession,  
Hac em bige hep faut pardon.

Ur morian du , griz , lostec ,  
Horrubl gant e dreit crabaneç ,  
En eur c'hourdrous terri va fenn ,  
En deus serret va guinou crenn .

Mallos d'ar goal gompagnunez ,  
D'ar sorcerien , da bep nôsvez ,  
Mallos d'ar bal ha d'an dançou ,  
Zo bet qiriec d'am pec'hejou .

Na bedit Christen evidòn ,  
E creiz an ifern coezet òn ;  
Coachet òn sioüas , gant Satan :  
Evit va lesqi en e dan .

Clêvit , Christen , ha clêvit pis :  
Bep pec'het côvessait hardis ;  
Mar sentit ouc'h an drouc-speret ,  
Eguis Cathel e viot collet .

FIN.

---

E Montroulez , e ty LÉDAN , ru ar Pave .